

(f° 248)

Kloarek Dimeet.

Debonjour dec'h greg ansien dibonjour dec'h a laran,
Konjez d'ho merc'h da zimezi diganec'h a c'houlenan.

naç he leal Kloarek iaouant⁽¹⁾, id da goulen digant he zad
Zo er jardrin o pallad.

ma ro dec'h e gonsantamant me reio ive ma gras mad.

Debonjour dec'h ozac'h ansien debonjour dec'h a laran
Konjez d'ho merc'h da zimezi digan-herc'h a c'houlenan.

— Va merc'hik a zo iaouantik er bla man bezza dimeet
Mar kerot dond da vloaz d'he c'haouet c'houi ne viot ket refuset.

ma na meus ket anei er bloa man evid da vla nem bezza ked
Rag tost eo dija an termen d'in da veza beleget.

— Na dallit-hu Kloarek iaouant na dallit-hu o mouchouer
tri berad goad a laran enan evid donnet d'ho dilezel.

— Na dallit-hu Kloarek iaouant na dallit-hu o karante,
evid n'or bo ked a vallochou o timit or bugale.

7

Janneton Puill. 16, juin 1851.

(1). — Il me semble que le c final de : iaouanc a été écrit sur un t. — Ce n'est pas un K, toujours bien formé.